

## CHANSON AN DANÇOU

*Var eur ton nevez*

Tostaît amâ, tud a squient, me o ped hac o suppli ;  
 Manet e zor amâ bouhet gant va oll filosofi,  
 Crigoat a ran va bziêt, a frotta a ran va zal,  
 Hep gallout birviquen compren, en laret ran, hep farçal,  
 Ar charmantis d'ar yaouanquis da lampat a da zança!

An habitud-se a deu gante, me a gred, var an douar,  
 Pe autramant en contractont da dri bloas pe da bêvar,  
 Vit, p'ello ar grenardezet treina o c'hotitonen,  
 Hac ar grenard-t o unap boutouni o braguezen :  
 Na eller pelloc'h o delc'hel, ar yaouanquis zo no feu

Eun tam oc'h divezat, beleyen, d'o c'hervel d'ar c'hatekis,  
 Ha pa ve possubl e c'h affec'h, da gass o c'horf d'an ilis,  
 O speret zo enn dançou, gant-se ne raint netra,  
 Da galz eus ho questionou o guensyou a lavar ha!  
 Pa c'houlfet hac int vo christen, e respontint *tra la la*.

Neuze ec'h eset en coler, hac e zertot a ezea, [c'hichen  
 Ha goucoude, m'en em sonchfec'h n'en doc'h mann eu o  
 Noc'h qet capabl, gant hoc hoil studi, eveite d'ea em beintan :  
 Pelec'h oufec'h-u c'houi laqit jour en eur c'hoel doublet a ran,  
 Nac ho mouchouer en galquen, pelec'h oc'h manet breman?

Ne zeus libouden a bemp bloas no zesco dec'h ho quentel,  
 Bea o deuz eur mezélour, pintet int en demezel,  
 Dec'h e voa en e jaqueden, na vonie quet e *fater*,  
 Dantelezet é e c'houefou, brodet é e davancher,  
 Friset é e c'hotelinen, rubanet e boutou lèr.

Me gred e clévan ar zoner savet var er variquen,  
 Tano é diou scouarn ar merc'hel, sevel a reont o fenn ;  
 Deustu commançont da vresquel adreus an ed, ar c'heuyou,  
 Vel pa ve an diaoul var o lerc'h, pe autramant aa ancou,

Pa vint êru var ar blenen elec'h ma-vo an ebat,  
Evit n'eum disquez d'ar botret e clasquint eur c'hleun benac :  
Neuze fichint o davancher, e tressint o zoaleten,  
Evit pa dremenot potret charmi o amoursien,  
Rei da ema eur zer lagad, d'eguile eur c'hoarzaden.

C'hoez ar botret, pa dremenont, a ra strinca ho c'halon ;  
O daoulagad zo flambezou alumet gant Cupidon ;  
Trei a distrei a reont tout gant c'hoant da veza qerhet,  
Quement e c'hrillont gant anvi da veza souden hijet ;  
Penevert n'en dê quet ar c'his, e larget : hastit potret.

Ar botret zo er c'hostez all destumet a vandennou,  
N'int quet evit derc'hel ou bragou, anez caout bretellou ;  
Ema 'l lèz en beg o friou, roet gant o mamou-dê ;  
Tri anê ne dint quet capabl da gass bioc'h d'ar c'hollê,  
Cetu eno ar ganfardet a zo tançal nos ha de.

Ne oun ha me a zo troublet, pa velan peder demezel,  
Peb a barapluie zo gante, me gred sei pe satin scler ;  
Ma vije bet tom an amzer, o doa peb a barasol.  
Evit beza distinguet mad hac enoret gant an oll ;  
O daouarn a zo manegot, d'ampech roussa gant an eol.

Patientet, ô va Doue ! n'allan mui en em zouten.  
Eun debiter, bennos Doue, n'eus eur montr en e c'hodel ;  
Neus messaer moc'h na denved, digoc'her saout na qezec  
Nen deus eur bragou pont-bian hac eur giletten fleuriet,  
N'a zoug e doc var e sôuarn, eur c'horn butun en e veg

Pêvar ha pêvar e zeont da zaludi o mestrez,  
O zoc en o dorn e c'houlont : Bea a po ar vadelez...  
Hep gortos fin d'ar c'hompliment, ar plac'h a respont ia ;  
Quement e deus c'hoant da lampat, quement e ma bars en joa ;  
E lec'h rei dean e c'houlent, e carfe en briata.

En eur rond en em laqueont, evit commanç da lampat ;  
Mar de pec'het sellet dançal, o discoe n'en de quet mat,  
Disparisset, jestou lubric, impudicationnou,  
Disparisset, disparisset, danç vocen an eneoù,  
Invantion an drouc-speret, evit boeta ar flamou.

Neuze vo an demezellet, n'int qet pedet da zançal,  
Oc'h ober an dro d'an dançon, hac oute tout façou fall ;  
O minou a ziscoe facil in antreet en coler,  
Mantret e ze o c'halonou : vit apesi o c'holer,  
De critics en d'esperer eoh implijet e amzer

Sell, emei, pesort libouden a zo da zañçal qerc'het !  
 Ounes a zo eur sovagen na voar na comz na qerzet ;  
 Sel penos e ma e diilat ! sur ne deus qet teir ivis,  
 He zad so e clasq e vara ; sellit ouzevn d'am bis,  
 Ousp'en tregont vloas neus hounont e bléo a so dija gris.

Sell peguen sot e zé ounes e quichen e c'havalier ?  
 Neus fors petra lar ar zoner, ne ra nemet *ter-a-ter* ;  
 An *ant echa*, an *él de pignon* a ra tout gant al *lete* ;  
 Re bouner e ze e bouteu, na zistag qet ar *brize* ;  
 Vals, *chasse-hait* n'ententont qet, ar *balance*.

Me a vel an eol o cuza, finissa a ra an dançon :  
 Ar plac'het a lamp d'ar potret, da furchal o godellou ;  
 Ret e caout per pe avalou evit terri ar sec'het,  
 Biquen na vint lezet tranquil, quen a lavaro ar botret :  
 Antreomp en hostaliri, m'hor bomp eun dra benaquet.

Gomplimanchou rei ar merc'het, pa gommancint da eva ;  
 Mes na vo quet fin d'ar barti, na vo int ar goassa,  
 Goalc'hi reont o gorsailien, güin ha gist a dremenont ;  
 Carzet e godel ar botret, ha bepret e leveront ;  
 Quen a vo ar güin-ardant, biquen d'ar gær na yefo:np.

Crial a huchal a reont, en hent bras var boes o fen,  
 An nep o c'hlevfe, a gredfe, eve eur foar o tremen :  
 P' eruint en o demeuranç, deus-tu clasquit ar c'haignou  
 Ha ne zeus den evit compren petra a reont enou ;  
 Badiantchou hep son cleyer alies zo 'n effejou.

Ar plac'h na gavo potr ebet zo en ber instant chanchel ;  
 E c'hoef a laq var e bisach, adieu a laro d'ar bed ;  
 En e dorn zo eur chapeled, sances e ma o pedi ;  
 Pa sonch en amzer dremenet ne ra nemet hirvoudi,  
 C'hoant e deus da vont da gouent. ha mui c'hoas da zimezi.

Cetui-ta en oregon, haaval e eus eur santez,  
 E ma' prometj da Zoue ferm na zimezo jamæs,  
 Essa a ra trompla Doue, mæs e c'houmzou a zo lach.  
 Rac en instant ma caveur potr e tol e froc e golach  
 E tev habit ha chapelet evit commanç ar menach .

Trivac'h vloas n'eus an dancerez : pa gav eur potr e teme,  
 Hijet e bet hac adhijet couls en nos evel en de :  
 Ar pez a van goude hija larer na dal netra,  
 Gouscoude ar poir e c'hemer a zo oll carguet a joa,  
 He van bep oar neub...

052

M'e guelfac'h ebars en dançou, ounnes a zo fleuren!  
 Admira a ra botret e c'hoantis hac e skient;  
 Excellant a voa d'al labour, menageres ar gaëra,  
 Bep nos divea da gousquet, sevel a re da guenta,  
 Preciussa greg a vije! Mæs chenchet e ze brema.

Mar boa coant, pa oe plac'h yaouanc, breman e vil da ferial;  
 E c'hotillon zo cramennet, e bleo tennet var e zal.  
 Dibren e ganti e dillad, collet ganti e spillou,  
 Ar vic'hien demeus e fri a ziver en e guinou,  
 Evit e zouch, hep n'em vantan, eo ret caout pincetezou.

Sances e ma o cluchenni e ti e c'homerezet,  
 Pried, bugale ha menach, oll e vent abandonnet;  
 Ne voar na canna na goalc'hi, na memeus scuban e zy;  
 Ne vanc na plous na c'hoen ennan; carguet e a loussoni,  
 Evit antren hep vomissa e ret stoufa stard ar fri.

Pa ha an itron var e zorchen azeet en e c'hoaze,  
 Ha pa ve an tan dindanni, na zavo quet ac'hane;  
 Impliget e tout ar voyenno neus quen manet netra,  
 Ret e brema chanch a vicher ret e mont da glasq bara  
 An osac'h, lec'h dont de c'honsoli a deu prest de bahata.

Cetu aman eur zon neve, cetu ama eun danç all;  
 Chasse-huit e ret da ober, pe vea scoët ractal;  
 Ha pa vanco an c'anceres, deus tu devo eur vazad,  
 Hac ouspen, eun tol troad en e reor ma pa ve buon a droad  
 An dans quenta ve auviabl, mæs oma na ne quet mad.

Finissan ran va chanson na bad pelloc'h va sujet,  
 Ho pedi a ran dam excus, mar e meus oc'h offancet,  
 Quement-ma so abuzou, n'o guelomp nemet re bemde,  
 Hac a deu, sivoas, re alies d'offanci e Vajeste  
 Bea int moitvou indeçant eus a re a liberte.

*Kannig. inv. Vann  
 G. J. Hic*



*Handwritten scribbles and the number 7122*